

ZON ER MOTEURIOU

441

I

En est zo trohet ag ive dastumed
En amzer zo bed mad, en oll zo ricouret
Ken lavar er re goz na pe teufe er goan
Deuit zerret an est mad ag er hayout outan.

II

Er bevar horn deuz er vro, breman a vou clevet
Mouez er moteuriou e ronflad, er tornou en ed
Kals a pligadur a ve nac heuil a re ze
Gret silence d'em propojou, ag e clefet en ne.

III

Ian ganfard a lare deja on tammec zo
Daoustan ben pede goulse heil er moteur en dro
Hir cavan en amzer o hortoz kemese
Car mi meus hoant bras d'ober on vestrez neve

IV

Er ver'h lare dih man boa oi en ned non fleur
Mi riche amont on charro mode ive ben er moteur,
Mari lare di hoar pe en er moteur en dro
Unan e eil bemde,, a pemhini di dro.

V

Setu aru en de en hini oa laret
Deus er pep tu en dud zo diredet
Tud youank a tud coz hin aru da devez
Gant cals er pligadur amont assemblez.

VI

Ae er leur zo deuzet, na da gommans crenan
Lancet e er moteur, her breman da dornan
E potred zastum er plouz, er merhed zo dro da grain,
pemhini gant i jeu vel ganthan i heur.

VII

Pe ve achu gand unan, her da vet iguile
Er tace clege bont bed er tri hart deuz er ble
Chic a guinardant e ve ag ive pension vad
Honez e guellan micher nac a zou mouillen da gad.

VIII

A breman er botred nomp ober ou labour
E treusac er merhed e rein zellou flour
Car e reman zo charmant ive quein délicat
Mes donnet reint da hoarzin nomp ober eur zer lagat

IX

Koulscoude deuint laret, herve meuz clevet
Vit er bla neimquet d'ar pel gand er canfardet
Er merhed za da chans vel teu er mode neve
O ben me lareint nan, a hoant te koulscoude.

X

Mes er ganfardet ruset ne reinquet e oad fal
Ag e voar dionté ken ve ou zoad er pall
Neus coseal brav ganthe, hin bed caret dustu
Kouse e veit gueitad, pe ve navel e du.

XI

Ber ve cavet en amzer a vasquou pel pe plous
Er ganfardet ve nou jeu, er merhed ve didrous,
Breman vo coseet ve dimeuz er amitié
Deuz zo tremenet a deuz ar neve.

XII

Contant ve er merhed a clevet pojou mad
Mes ian ganfard golquet amzer a comans cravinia
Paouez ! Paouez eta ! heman zo aru zod,
Mes pe ve dour voar er vilin ve roed tro da rod.

XIII

Zoizic oa et d'a Paris, o ia, er boa pelzo
A hervan e clevan e man tonet da vro
O na de ouele; e zud, dor ou bale da guer
Choiset deuz er mament ive ben er moteur.

XIV

Car en théâtre, er cinema ve duse er herriou
Ninquet da comparu pligadur campagnou
Berrot ve cavet en amzer o vale en « Breiz-Izel »
Vit hont da vellet « Paris » ag en tour « Eiffel »

XV

Bemp noz nag eve dans o beteg er beurre
 En talennou ia en dro, pligadur zo ive
 Mes red vou guelet, perr vou en treh
 Pehini ra deuz e veuillan, o ia zur e vet beh.

XVI

Er re goz va corn en tan e comptou ou doare
 Ber cavet en amzer pligadur deuz ive,
 O horn ganthe no dorn sellat an danserienn
 Mimp er gare dijen hoas en pemp bla varnugen.

XVII

A re youank nomp amus, oas vou gret marhrjou
 Be de pardon « Bulat », cals neuz rendez-vous
 Ian ganfard neuz gret ou vestrez a deit ou ble melen
 Desireint bezan staget gant ou memez chaden.

XVIII

Zoisic zo eit var i hiz a ha huitad i bro
 Neur gueunade deuz i sud da shuil daelo
 id.
 Mes oisoh a cave cuitad er moteuriou.

XIX

Scrivet deuz d'ar guer da laret neiquet mad
 Pe voa bet bars er moteur voa eit pel ni lagat
 Breman tudou youank lavaran dahu hui
 Dioual a refet d'ober vit bezan disouci

XX

A ben er bla ive meuz hoas esperans vras
 Re hanomp vou tud youank er voulou en eil oas
 Setu aze en depeigne dimeuz er moteuriou
 Pere ve nevead bep bla en nomp bro.

XXI

Mar cavet faut ebars, me o ped corrigean
 Ma meuz choquet, ebene pardon er houlenan
 A goude vi maro delhet zons en hanon
 Laret da sant Hervé ou pater evidon.

STEUNOU Jean

BOURBRIAC.

